

# Chant breton : Gwir Vretoned


Paroles: Potr TREOURE (Abbé CONQ) (Bretagne)

♩ = 100

## Refrain



## Couplet



QR-Code du MP3



Notes: Partition pour clarinette Sib

Transcription: Roger Négaret, mars 2022 ([roger.negaret@laposte.net](mailto:roger.negaret@laposte.net))

# Chant breton : Gwir vretoned

Potr TREOURE (Abbé Conq)

*Diskan*

*Gwir Vretoned, tud a galon, war-sav  
Da ganañ gloar da Vreizh hor bro  
Ha da ziwall teñzor he yaouankiz  
Ar yezh, ar peoc'h hag ar frankiz  
War-sav, war-sav !  
Da ganañ bouez-penn  
Breizh da virviken, Breizh da virviken ! (bis)*

O va Breizh, gant da dourioù brudet  
Da vor glaz ha da venezioù  
Da vrug ruz ha da lann alaouret  
Te zo koant dreist an holl vroioù

Ne'z eus ket 'vel e-touez hor c'herreg  
A dud vat seder ha nerzhus  
Ne'z eus ket 'vel en hor brezhoneg  
Sonioù drant, gwerzioù dudius

Hon tud kozh, tud leal ha santel  
Start evel an derv kalet  
A ouezas mirout da Vreizh-Izel  
He brud vat, he nerzh, he c'hened

Bretoned, savomp hor c'halonoù  
Ha touomp e talc'himp atav  
Da vale war roudoù hon tadoù  
'Keit ha ma'z ay ar bed en-dro !